

Àr Falc'heurien.

I

Va zelennig chenchomp a don (*bis*)
Lezomp or guelvan or c'haon.

DISKAN

O iada
Kanomp gant joa
Eur ganaouen
D'ar falc'heurien

II

Ar falc'heur paour a sao mintin (*bis*)
Abred e za gand e ribin

III

Alies kerkent diou a teir heur (*bis*)
E man var sao ar c'heas falc'heur.

IV

E bater neuze a lavar (*bis*)
Ne vez quet hir, an oll er goar.

V

Mont 'ra en hent drant a seder (*bis*)
Rak eur paotr crenv eo ar falc'heur.

VI

Gand e vorzol ag e anve (*bis*)
Me gred en deus eun tam fouge.

VII

— « Va mean zo mad va falc'h zo lem (*bis*)
Ne manq quet ar c'hal var e drem.

VIII

Assa potret holl 'maomp aman (*bis*)
Piou vo hirio an diveza.

IX

Abars commans ar c'habiten
A den e dog 'ra eur beden.

X

Goude tap krog er mean lemman (*bis*)
An holl botret 'ra eveldan.

XI

Setu an holl filhier o sini (*bis*)
Assa pactret kouls eo kregui.

XII

Er foennog ne ves mui klevet (*bis*)
Met trous ar filc'hier o redet.

XIII

Pa vez an deiz o c'houlaoui (*bis*)
Ar falc'heurien zo a zrevi.

XIV

Eur bligeadur eo o guelet (*bis*)
Pa vezont var gorf o rochet.

XV

O falc'h a ra eun hanter tro (*bis*)
Ar foen a strikont diouto.

XVI

Ar streou a zao evel kaeou (*bis*)
Ar botret zo rus o fennou.

XVII

Rak var ar gliz eo peurvuia (*bis*)
E klaskont holl e n'em essa.

XVIII

An dour a red teid an elguez (*bis*)
Mes chom adren biquen jamez.

XIX

Hardi potret chachomp ato (*bis*)
D'ar foennog vras greomp e baro.

XX

Erru Mari Jeann gant dijuni (*bis*)
Leas ar chaodel a zo ganthi.

XXI

Al loaiou beuz a c'hoari mad (*bis*)
Buan eo rincet ar bodezat.

XXII

Goudeze krogont adarre (*bis*)
Mont a reont iud e teid o stre.

XXIII

Evelse tremen an derves (*bis*)
E kreis al labour hag ar pres.

XXIV

Gourvez a ra ar c'heas falc'heur (*bis*)
E gorf brevet gand ar scuisder.

XXV

Ancounnac'hat a ra e boan (*bis*)
O tribi kig a fars d'he goan

XXVI

Eürus an den o labourat (*bis*)
P'en deus feis a bolontez vad.

XXVII

Da Zoue e kinnig e boaniou (*bis*)
E c'huezen hag e labourou.

XXVIII

Er baradoz e tiskuizo (*bis*)
Eur gurunen en deus eno.

Louis PAGE.

Droits Réserveés.

Landerneau, — Imprimerie de DESMOULINS

CHANSON NEVEZ

FANCH KOZ

4

Me zo mecanician
 Evit guir m'ar deus unan.
 Dressa ran dourneureuzou
 Kerkouls hag ar manechou.

Diskan

Ia potret, me eo Fanch koz,
 Stag a labour deis a noz.
 Mes kaer e meuz loppa,
 Me zo paour er memes tra.

Va daouarn a zo kalet
 Evel pa vent dirennet
 Hag an divrec'h-man zo cre,
 Stomog-mad a zo ive.

3

Ma ve cavet unan all,
 Un den goest eur marichal,
 N'en deus nemet dispaka,
 A Fanch kos a zo aman.

4

Me zo guest d'ober eur bal,
 Tranchou nevez-mil dra all,
 Ern kezek a ran ive,
 N'oun ket nec'het possabl-ve.

5

Pourmen a ran mont a dont,
 Heb beza gual divergont;
 Mes gouzout a ran (chinan)
 Jakou te zo (bon enfant.)

6

Va mounis gant re Jakou
 O ia tout e banneou.
 Mes kaer hor beus eva
 Hor sec'het ia var goassa.

7

Va labour a va c'huezen
 A ia oll dre va gueren
 A mill mallos a bedan
 Var an drogac'h a lonkan.

8

Sethu erru ar gozui,
 Me malheureus an hini
 A vezо evel-don-me
 Re droet gand e vanne.

9

O Sant-Alar benniguet
 Patron ar varichalet,
 Goulennit ma teuin aben
 D'ober eun tam pinijen.

10

Ha neuze me lavaro :
 O va morzol dao atao,
 Mar deo guir en deus Fanch koz
 Eur plac e'hoaz er barados.

LOUIS PAGE

Droits réservés : Le Gall Yves